



## G U E R Z N E V E Z.

*Var eun ton nevez.*

**M**'AM be avoalc'h a studi, ha speret da rima,  
Haceurbluen em dorn, ha me prest dascrifa,  
Me gomposfe eur reglen hervez va zantimant,  
Var sujet un antretien entre daou zen yaouanc.

Mesqent avanç davantach me c'houlén asistanc  
Eus ar sperejou caëra qent eguet e c'hommanç,  
Da rêi lumier d'am speret, pa meus occasion  
Da ober eur son nevez hervez va intantion.

Pa lennàn eul leor bian zo en cayer va studi,  
Me a gav traou surprénabl hac a ra chagrin din,  
Pa lennàn va flanedén scrifet gant va mestrez,  
Eus va brassa plijadur me meus tristidiguez.

Pa voan ebars em jardin em oll gontantamant,  
Me remercas eur fleuren a voa guyê ha brillant;  
Qer brillant e voa e deillou hac an eol ardant,  
Pa deu deàn da bara ebars ar firmamant.

Ounnez a zo eur fleuren eus a velanconi,  
Antreet doun em c'halon ha dies da effaci;  
Prinç an oll amouroustet, roue an dud yaouanc,

E c'hundu dre e sellou d'am renta languissant.

Qenta m'am boe an enor da velet va mestrez,  
E voe ebars er porchet goude an ofern-bred;  
An eil güech ma e güelis, assuri a ellàn,  
E voa ebars en ilis bet e communia.

Oc'h ober e fasq qenta emesq ar vugale;  
D'an ampoent-z'e voa yaouanc ha me a voa ive;  
Aben ur pennad goude yis d'ar scôl da Voengamp  
Hac hi er memes amzer a voa bars eur gouant.

Ma teuis da zilezel va education  
Evit dont d'e antreteni eus a greiz va c'halon,  
Evit dont da antreteni Rouanez ar fleurjou,  
Ha demeus ar c'haëra fleur a zo er jardinou.

Ounnes a zo eur fleuren eus a velanconi,  
Caëroc'h eguet fourdelis nac ive romani,  
A meus dezir da goenvi; assuri a ellàn  
E laqayo va c'halon var ar poent da rannàn.

An eil devez a vis eost me lacas em speret  
Hac ive em fantasi mont da velet merc'het;  
Mont da velet va mestrez, rouanez va c'halon,  
Va oll dezir er bed-màn, va inclination.

Debonjour d'êc'h, va mestrez, an devez a hirie,  
Gant eur galon güir gontant evel zo ganén-me;  
Gouscoude p'en em sônjàn e voa dîn lavaret  
Ne ràn nemet coll amzer o tonet d'ho cuelet.

Sot oc'h sur, va zervicher, mar teuit da gredi  
Ar goal dêodou milliguet a glasq hor separi;

Ha pa vec'h din dispennet qer munut hac ar pell,  
Ze ne rafe qet din-me donet d'ho tilezel.

Pell a zo deus a amzer me am boa deziret  
E teujac'h d'am zaludi vel va muia caret;  
Ne lavarec'h guer ebet, ne r'ec'h qet a zeblant;  
Me am boa displijadur mare d'oe plac'h yaouanc.

O traïtourez millignet! tavit ho preposiou,  
Rac disfianç a rit din pa glêvàn ho comzou;  
Ia, disfianç a rit din o clêvet ho comzou  
Ebars cayer va studi demeus ho preposiou.

Eleal, va zervicher, va c'hredi a ellet,  
Rac me sinfe gant va goad ar pez' meus lavaret.  
Dalc'hit d'am darempredi ha bet fidel din-me:  
Biqen ne vimp separet an eil ouz eguile.

Qen' deuy Doue d'horguervel vit ar vech divea  
Da vonet da renta cont da Grouer ar bed-mâ;  
Qen a deuyo ar maro d'êchui hor bue,  
Biqen ne vimp separet an eil ouz eguile.

Me meus güelet va-unan differanç diouzin,  
Mari, Mari, va mestrez, eus ho tarempredi,  
Ha tud a zo puissant bras, o deus renq ha leve:  
Me ne meus qet a vadou, gout avoalc'h a rit se.

Ouspen qementse a zo, emei, va zervicher:  
Ar madou hac an arc'hant a eller da ober:  
Eun den a vez demezet enep e zantimant  
N'ell qet terri e gontrat evit aour nac arc'hant.

Qement zo var an douar gant va Doue crouet,

An oll aour, an oll arc'hant en eur'pres destumet,  
 Hae vent roet din-me, neven qet c'hoas contant  
 Man'am be qet ar boneur da bossedi va c'hoant.

Me a meus grêt eur boqet eus a zivision,  
 Evit rêi d'am mestrezic passetanç va c'halon,  
 Hac e meus grêt aneàn demeus a huanad  
 A laqayo d'en erren eur ruban eus va goad.

O tistrêi deus ar pardon, ha var lein ar mene,  
 Eun devez dreist ar re-all e lavaras din-me :  
 Ma na garit chench contre, pellaît diouzin,  
 Rac an têodou milliguet a glasq hon separi.

Onnes ê ar bromessa o poa-hu din-me grêt  
 Diveà'm boe an enor, va mestrez, d'ho quëlet ?  
 C'houi a bromettas din-me hac ive dre ho le  
 Ne vijemp qet separet, evit deus ho coste.

Varben eun nebeut goude int bet dispartiet,  
 An effet eus ho comzou a zo bet eprouvet ;  
 N'eus netra var an douar, m'ell assuri ervat,  
 A scò eun toll qer marvel evel eur goal dêodat.

Pa voan ebars em güele nôs gouel ar Rouane,  
 Me glêve eun eün em jardin hac agane calz guyê ;  
 Lavarat a rê facil an eünic dre e zon :  
 E màm da vuia caret en desolation.

Deus ar mintin, pa zavis, me scrifas eul lizer  
 Da gaç d'am muia caret dre dorn eur messajer,  
 Da glêvet he zantimant evit ar vech divea,  
 Güell e zê mervel buan qent chom da languissa.

P'êruas ar messajer ebars ty va mestrez,  
 E voe diguemeret mat vit e divea güech;  
 Qemer eure al lizer hac antre en e c'hamb  
 Da scrifa din va c'hönje neuze souden vatant.

Ho setañ a c'houlennit, emei, va zervicher,  
 Assuret oc'h d'e gavet ebars en bër amzer;  
 Ma vizac'h d'am zantimant, mat ec'h ellit credi  
 Ne voa nemet ar maro capapl d'hon separi.

Mes na brêmàn na goude, emei, ze zo certen,  
 An amzer din d'ho caret na êruo biqen;  
 An amzer dêc'h d'am c'harout na êruo biqen;  
 Pa em boa-me bolonte, e voa dêc'h va goulenn.

Me zo eur minor yaouanc o poursu va studi,  
 Hac am bezo er bloa-màn calz a velanconi,  
 Hac am bezo er bloa-màn eur galon glac'haret,  
 Estonet bras o velet na en em gariemp qet.

Pa deuiannavez-amzer, ar bleun barserspern  
 güen,  
 E vo calon yaouanqis guyê ebars pep tachen;  
 Ar fleurjou er jardinou a vo oll rejouisset,  
 Ha calon an dud yaouanc en pêvar c'horn ar bed.

Mes me zavo eun dourel var lein eus ar mene,  
 A faç da dy va mestrez ha d'am hini ive,  
 Da vouelagantvaglac'hard'am amzer dremenet,  
 Da ober reflexion em planeden galet,

Pavoan-me deutac'hane eur pennad eusezy,  
 Ha me clêvet lapousset er bod o fredoni;

Ha me o chom d'o zelaou hac ive complesant,  
Rac ar chanson a ganent a voa oll ravissant.

Cana a rent qer charmant, cana a rent qer yiê,  
Rejouissa' rent calon qement oll o c'hlêve;  
Ma commançjont lavaret din ive dre o mouez:  
Petra' dal dide, cloarec, qemer tristidiguez?

Petra' ra did n'em nec'hi er bed-màn gant da  
chanç?

Dânve madou zo certen ebars en abondanç;  
Te a zo ebars er guêr gant da vam ha da dad,  
Ne c'heus nep necessite a voued nac a zillad.

Ha me a zo o cana ha calz guyê va c'halon,  
Ha me ne meus er bed-màn nep tam pourvision;  
Finissa' ras hep dale neuze en eun istant,  
Ha rentet goal joaüs bras calon eunden yaouanc.

Güechal m'em boe eun amzer a zezolation,  
Mes brêmàn me zo joaüs, triomfant va c'halon;  
Me voar e gana brêmàn certen, va mignonet,  
Vel an ene ve barnet da vont d'ar joaüstet.

Varben eun nebeut goude int bet en em gavet  
En eur plaç a goste o daou o devoa bet choazet,  
Da rentan eil d'eguile ar pez a voa dleet,  
Ha da derri'r bromessa a voa entreze grêt.

Debonjour déc'h, va mestrez, emeàn pron-  
tamant,

Petra a zo a nevez en ho comportamant?  
Divea ma ho cuelis e voa brillant ho sellou,

Ha brêmàn n'o remercàn nemet o scuill daëlou.

Hac hi o respont din-me, ia en eur guer bêr:  
C'houi zo qiriec d'am glac'har, emei, va zer-  
vicher:

Retornit c'hoas-ta eur vech d'am c'haout, me zo  
contant

Da resina va buez evit cavet va c'hoant.

C'houi-ta assur, plac'h yaouanc, certenamant  
zo bet

Ar guenta gouarnerez imprimet em speret;  
Mes daëlou va daoulagad o vouela nôs ha de,  
O deveus va oblijet da chench a volonte.

F I N.



## G U E R Z.

*Var eun ton meurbet trist.*

**T**OSTAIT, calonou sansibl, selaouit gant silanç  
Ar recit eus va glac'har, trista experianç!  
Ar Fortun en e c'holer, deut eus an eürustet,  
Ha dre mouvamant e rod e deveus va strinqet.

Ah! tao eta, calon baour! izella da glemmou;  
Ro liberte d'am speret dá zespeign e boanniou,

C'houi ive, va daoulagad, zo en em dizec'het :  
Va guinou na ell mui comz, re oc'heus-i trempet.

Brêmâ carguet a chagrin, va c'horf ha va ene  
Abandonet oll a grenn d'ar brassa calamite ;  
C'houi, va oll faculteou ha moderation,  
Evit m'ellin güell brononç va oll affliction.

O amzer a blijadur, te zo ta tremenet !  
Consolation, esperanç, zo evidomp collet !  
Allas ! o sônjal rentout parfetoc'h ar boneur,  
Hor bez bet troublet hor chanç, fabriqet hor  
maleur.

F I N.




---

E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr.-Librer.